

# Echu an dec'hadenn

**D'an 18 a viz Meurzh 2007 e oa bet harzet Cesare Battisti e Brazil, ma oa tec'het kuit e 2004.**

**t**ri bloaz ha hanter-kant eo Cesare Battisti. Bet ezel eus ar PAC (Proleterien Armet evit ar Gomunou-riez) e oa bet bac'het e 1979 ha kondaonet e 1981 evit bezañ bet en ur strollad armet. Tec'het e oa kuit eus an toull-bac'h hag aet d'en em staliañ e Mec'hiko. E-pad an amzer-se e oa bet aozet ur prosez all en Italia. Kondaonet e oa bet e 1988 da dremen fin e vuhez en toull-bac'h evit bezañ bet lazhet pevar den er bloavezhioù 1978-1979.

## AR STAD C'HALL

A-viskoazh en deus dinac'het bezañ kablus eus ar muntroù-se. E 1990 e oa staliet e Pariz p'en doa embannet François Mitterrand, prezidant ar Republik d'ar poent-se, ne vefe ket kaset da Italia en-dro an aktivisted o doa dilezet ar stourm armet. Dimezet eo bet ha div verc'h en deus bet. E Pariz eo chomet betek miz Eost 2004, c'hwec'h miz goude ma oa bet goulennet gant Silvio Berlusconi, kas Cesare Battisti en-dro da Italia da lakaat anezhañ en toull.

## TEC'HOUT ADARRE

Bac'het e oa bet e-pad meur a sizhunvezh e Pariz ha lezet da vont da c'hortoz e vefe divizet war e zazon. An Italian n'en deus ket gortozet. Tec'het eo kuit gant an aon da vont d'an toull-bac'h hep gallout kaout ur prosez reizh. Soñjal a rae e vefe bet asantet gant Pariz kas anezhañ da Roma, ar pezh a oa bet graet en ofisiel e miz Here 2004.

S.G.



E-pad e dec'hadenn en deus kontet Cesare Battisti e vuhez kuzh en ul levr bet embannet e miz Ebrel 2006 : *Ma cavale*. D'an 18 a viz Meurzh 2007 eo bet harzet e Brazil, gant sikour poli-serien c'hall hag italian.



## Pennadig-kaoz gant Gérard Allé

### Kazetenner-skivagner, tro en deus bet d'ober anaoudegezh gant Cesare Battisti

#### Penaos ho peus graet anaoudegezh gant Cesare Battisti ?

Dre ar saloñsoù levrioù omp deuet d'ober anaoudegezh. Damheñvel e oamp pa vezemp e kreiz bedig-bed al lennegezh e Pariz : me a oa ar Breizhad, eñ a oa an Italian harluet. Tomm e oa d'ar stourmoù a vez renet e Breizh. Soñj am eus bezañ bet en e di an deiz ma oa bet un daouzek mil den a oa bet o tibuniñ er straedoù evit ar brezhoneg. Lâret en doa din e oa brav, hag e oa ret kenderc'hel, derc'hel. Plijout a rae dezhañ dont da Vreizh. Deuet e oa e Lambaol evit saloñs al levrioù polis, e Douarnenez evit un diviz... Lâret a rae din e oa ar vro estren bellañ ma c'helle mont rak n'halle ket mont er-maez eus ar Stad c'hall.

#### Peseurt doare den eo ?

Un den evezhiek ha didrouz a-walc'h. E familh a oa eus an tu-kleiz pellañ hag er gêriadenn ma veve e oa an otroù-maer ur faskour kozh. Alies e veze e dad o lâret

en doa c'hoant da skarzhañ anezhañ kuit gant e fuzilh. Desavet eo bet en ur aerglec'h a stourm, gant istorioù damvojen-nel a-wechoù diwar-benn ar Rezistañs italian hag an dispac'h.

#### Petra a soñje eus e stourm bet ?

Keuz en doa e vefe bet kement-se a dud yaouank o vont eveltañ da dapout armoù evit ren o stoum. Un dek mil bennak a aktivisted a vefe bet er bloavezhioù 1970 en Italia ha pa veze manifestadegoù kengred e oa ouzhpenn ur milion a dud er straedoù. Lâret a rae e oa bet paket ar re yaouank gant ar gouarnamant, ar polis, ar CIA hag all... hag a felle dezho e yafe an emsav sokial meur da get. An doare gwellañ a oa kas anezho war hent ar feulster dre ar gwaskerezh, al lazhadegoù politikel... Keuz en doa dreist-holl pa wele e oa deuet ar galloud a-benn da zistrujañ an aergelc'h a stourm, a grouiñ, a spi a oa pa oa yaouank.

Komzoù dastumet gant S.G.